

Modèle CCYC : ©DNE

**Nom de famille** (naissance) :


(Suivi s'il y a lieu, du nom d'usage)

**Prénom(s)** :

**N° candidat** :  **N° d'inscription** :

(Les numéros figurent sur la convocation.)

**Né(e) le** :  /  /



1.1

<b>ÉVALUATION COMMUNE</b>
<p><b>CLASSE</b> : Première</p> <p><b>VOIE</b> : <input type="checkbox"/> Générale <input type="checkbox"/> Technologique <input checked="" type="checkbox"/> Toutes voies (LV)</p> <p><b>ENSEIGNEMENT</b> : breton</p> <p><b>DURÉE DE L'ÉPREUVE</b> : 1h30</p> <p>Niveaux visés (LV) : LVA <b>B1-B2</b>                      LVB <b>A2-B1</b></p> <p>Axes de programme : <b>Axe8 « Territoire et mémoire »</b></p> <p><b>CALCULATRICE AUTORISÉE</b> : <input type="checkbox"/> Oui <input checked="" type="checkbox"/> Non</p> <p><b>DICTIONNAIRE AUTORISÉ</b> :    <input type="checkbox"/> Oui <input checked="" type="checkbox"/> Non</p> <p><input type="checkbox"/> Ce sujet contient des parties à rendre par le candidat avec sa copie. De ce fait, il ne peut être dupliqué et doit être imprimé pour chaque candidat afin d'assurer ensuite sa bonne numérisation.</p> <p><input type="checkbox"/> Ce sujet intègre des éléments en couleur. S'il est choisi par l'équipe pédagogique, il est nécessaire que chaque élève dispose d'une impression en couleur.</p> <p><input type="checkbox"/> Ce sujet contient des pièces jointes de type audio ou vidéo qu'il faudra télécharger et jouer le jour de l'épreuve.</p> <p><b>Nombre total de pages</b> : 4</p>

**Baccalauréat général et technologique**  
**Langues vivantes régionales - Breton**

**Classe de première**

**Epreuve 2 : Compréhension de l'écrit et expression écrite**  
**(3<sup>e</sup> trimestre)**

<b><u>Niveau visé</u></b> <b>LVB : A2-B1</b>	<b><u>Durée de l'épreuve</u></b> <b>1 h 30</b>	<b><u>Barème 20 points</u></b> CE : 10 points EE : 10 points
---	---	--

L'ensemble du sujet porte sur l'axe 8 du programme : « **Territoire et mémoire** »

Il s'organise en deux parties :

- 1- Compréhension de l'écrit**
- 2- Expression écrite**

Vous disposez d'**une heure trente** pour prendre connaissance de l'intégralité du dossier et pour traiter la compréhension de l'écrit (partie 1) et le sujet d'expression écrite (partie 2) **en breton**.

**Aet ar maout gant ar gouren**

Er mizioù tremenet ez eus bet trouz gant « afer ar maout » : klemm 'zo bet savet a-enep Bodadeg Gouren Breizh, gant ur gevredigezh gwareziñ al loened staliet e Pariz, abalamour ma vez roet ur maout bev d'ar gourener a zo trec'h en tournamantoù bras. Hag an dra-se zo difennet bremañ, hervez ul lezenn nevez savet. Bodadeg ar Gouren, kaset dirak Lez-Varn Brest d'an 8 a viz C'hwevrer, n'eo ket bet kondaonet, peogwir e oa bet savet klemm a-raok ma vefe lakaet al lezenn nevez e pleustr. Met n'eo ket echu an abadenn avat : ar gevredigezh he deus douget klemm adarre, dalc'het e vo ur prosez all hag an afer a vo barnet war an danvez ar wech a zeu.

**Istor ar gouren**

Evit kompren pegen strizh eo al liammoù etre ar gouren hag ar maout n'eo ket fall teurel ur sell war istor ur sport ken kozh ha Breizh koulz lâret. Kar ar gouren a vefe deuet da Vreizh-Izel gant an divroidi eus Breizh-Veur o doa treuzet ar mor etre ar 4vet hag ar 7vet kantved. An dud-se o doa degaset ganto o yezh, o sevenadur hag o hengounioù. Er Grennamzer e oa brud vat war ar c'hourenerien vreton. Bertrand du Guesclin, pa oa yaouank, a oa ur gourener eus ar re wellañ, hervez kont. E 1520 e oa bet un emgav bras etre François 1<sup>añ</sup>, roue Frañs ha Henri VIII, roue Bro-Saoz, en ul lec'h anvet « Camp du Drap d'Or » e-kichen Calais. E-kerzh an emgav e oa bet krogadoù etre ar c'hourenerien saoz ha re Bro-C'hall. Trec'h e oa bet ar Saozon a-drugarez d'o

c'hampioned eus Kerne-Veur, met dreist-holl abalamour ne oa ket deuet ar c'hourenerien vretan da sikour skipailh roue Frañs.

### **Sport ar bobl koulz hag an noblañs**

Ar c'hourenerien vretan a oa e-touez ar re wellañ en Europa, hep mar ebet. Evit gwir, adalek ar Grennamzer betek an 18vet kantved e veze pleustret ar gouren gant an holl Vretoned, ar re vras koulz hag ar re vunut, gant ar bobl koulz ha gant an noblañs. Ur maread a dud a zeue da sellet ouzh ar c'hrogadoù, aozet da geñver al labourioù bras war ar maez : dornerezh, leur nevez, eost. Roet e veze prizioù d'an hini gwellañ : tokoù brodet, mouchouer, pe ur maout. Adalek an 18vet kantved, ar maout a veze ar priz pennañ roet d'an trec'hour. Met, e fin an 19vet kantved, e oa krog ar gouren da goll lañs, evel sevenadur Breizh en e bezh, brezhoneg hag all, abalamour d'ar galleg a oa o c'hounit tachenn muioc'h-mui.

### **Ar gouren oc'h adsevel e benn**

E penn kentañ an 20vet kantved e oa ar gouren en dañjer da vezañ dilezet da vat evit krogadoù stumm Bro-C'hall, pe evit sportoù all diouzh ar c'hiz, evel ar football pe ar velo. Met un nebeut tud, en o zouez an Aotrou Cottonnec, medisin, o doa graet o soñj gante reiñ lañs adarre d'ar gouren. Gante e oa bet krouet ar FALSAB, a vod sportoù Breizh mod-kozh enni. Goude an eil brezel bed, daoust d'ar berzh graet gant ar football pe ar velo, e teu a-benn ar gouren da zerc'hel an taol, dre cheñch stumm, avat : ar re yaouank ne zeskont ket mui gouren gant ur peizant kozh eus o farrez, met er c'hluboù hag er skolioù, hag ar memes reolennoù a zo evit an holl. [...]

Diwar *Le Poher*, 24/03/2010

## **1. Compréhension de l'écrit (10 points)**

**Respontit e brezhoneg d'ar goulennoù amañ war-lerc'h :**

Eus Petra zo kaoz en destenn-mañ ?

Penaos e c'hell bezañ liammet ouzh an danvez-studi « An teroueroù hag an eñvor » ?

## 2. Expression écrite (10 points)

Respontit e brezhoneg da unan eus an daou c'houlenn amañ war-lerc'h.

Savit ur pennad-skrid a 120 ger d'an nebeutañ.

### Goulenn A

Ur gourener / ur c'hourenerez hag un ezel eus ar gevredigezh gwareziñ al loened en em gav asambles. Savit an diviz.

### Goulenn B

Diwar an destenn hag ar skeudenn-mañ, diskouezhit penaos e c'hell ar gouren bezañ ul liamm etre dec'h ha warc'hoazh e Breizh.



« Les enfants », Eric Legret, lec'hienn Bécédia Sevenadurioù, [www.bcd.bzh](http://www.bcd.bzh)